

RNB-3-027



# MISION PLEYBEN

6 C'HUEVRER 1945

## Kantikou Brezonek



QUIMPER - IMP. CORNOUAILLAISE.



# MISION PLEYBEN

6 CHUEVRER 1945

## Eurus an hini

*Eurus an hini a garo Doue  
Eus e holl galon hag e holl ene (bis).*

An den a blijo da Zoue, hon Tad,  
A zo diouallet ha diouallet mat.

En ti hag er park, en deiz hag en noz,  
Doue warnezan a skuillo bennoz.

Gantan e bried hag e vugale  
O devezo perz e bennoz Doue.

Evel eur vezenn, douret he griziou,  
E tougo frouez, deliou ha bleuniou.

## Meulomp holl

*Meulomp holl da jamez  
Jezus hag e vadelez (bis).*

Me ho meul, o va Jezus.  
C'houi hoc'h eus va c'houet,  
C'houi hoc'h eus va frenet,  
C'houi am mag, o va Jezus.

3

Mil berinoz deoc'h, o Jezus.  
C'houi a zo va fastor,  
C'houi a zo va zenzor,  
C'houi zo va holl vad, Jezus.

Pardonit, o va Jezus,  
Va faotou tremenet.  
En amzer da zonet,  
Me vo fidel deoc'h, Jezus.

Benigit, o va Jezus,  
Va c'horf ha va ene,  
Va mirit noz ha de  
Eus a bep droug, o Jezus.

## Kantik al labourer devot

Aman pell diouz an trouz  
Hag holl safar ar bed,  
Ar meziou am c'helen kerkouls  
Hag an habila doctored.

An douar a fourniz  
Frouez nevez d'ar poaniour,  
N'ho ro ket d'ar feneantiz,  
N'eus ket a vloavez hep labour.

Me a well ar gwenan  
Savet da c'houlou de :  
Me ive a dle kemer poan  
Da brofita eus graz Doue.

Holl evidoc'h eta  
Doue a garantez,  
Poan, melkoni ha joa,  
Hirio hag epad va buez.

\*

## **Evit alia ar pec'her da ober pinijenn**

*Poent ez eo deoc'h pec'her*

*Distrel ouz hor Salver* (bis).

Digorit pelloc'h dor ho Kalon  
Da Grouer ha Mestr pep unan ;  
Hir amzer zo, evel eur mignon,  
E sko, e sko... ha na rit van.

Penaoz, va breur, vit kaout an tanva  
Eus bara c'houero ar pec'hed,  
E falfe deoc'h da viken gwerza  
Hoc'h ene paour d'an drouk-spered ?

Dre nerz Dóue hag e vadelez  
Oc'h eus gwelet ar sklerijenn ;  
Daoust hag ennoc'h e chouezas buez  
Evit pec'hi ha netra ken ?

## **Araok an Taolennou**

*Sellit piz ouz an taoienou*  
*Zo mellezour an eneou*  
*Hag a lavar da bep hini*  
*Ar virionez hep damanti* (bis).

Daou hent a zo, daou hent hepken,  
Emaïnt digor dirak pep den :  
Hent an ifern hag hent an Env ;  
Hent ar maro, hent ar vuez.

Hent an ifern, frank ha ledan,  
Dre ar pec'hed a gass d'an tan :  
Darempredet eo bet atao  
Gant kals tud, siouaz d'ezo.

Ourgouill, koler, luksur, avi,  
Avaristed ha diegi  
Gant ar vezventi milliget,  
A ra eleiz a dud daonet.

Breman eo deoc'h téuler evez,  
Lakaat urz vat en ho puez ;  
Koll hoc'h ene eo koll pep tra...  
Re zivezad e ve lenva.

## **War ar finveziou diweza**

Sonjit den faziet  
Sonjit en eterhite.  
C'houi, siouaz, zo dallet  
Gant an droug, ar vanite.  
Sonjit e rankoc'h mervel  
Ha mont eus ar bed-ma  
Pa zeui Doue d'ho kervel  
Abarz nemeur ama.

Gant kals a spont neuze  
Ez it dirak ar Barner ;  
Striz eo justiz Doue,  
Ha goaz a-ze d'ar pec'her.  
Eur zetanz a resefot  
A vuez pe a varo  
Hag ar stad m'en em gavfot  
Da viken a bado.

Nemed eur vech hepken  
Ar baradoz ne goller ;  
Eus an ifern biken  
En em denna na c'heller.

Hogen baradoz kollet,  
Setu tout eat da goll,  
Ha báradoz gounezet,  
Setu gounezet holl.

---

### Tremen ra pep tra

---

Selaou, va breur ker,  
Buan ia an amzer,  
Tremen 'ra pep tra ;  
Nerz, madou, yec'hed,  
Yaouankiz ha gened  
Tremen 'ra pep tra (bis).

Skeuden da vuez  
Eo al lestr a velez,  
Tremen ra pep tra ;  
He roudou er mor  
Zo kloz a veac'h digor,  
Tremen 'ra pep tra (bis).

Kant vloaz ha mil vloaz  
A ve disterik c'hoaz,  
Tremen 'ra pep tra,  
Nemed c'houi, Doue,  
Hag an eternite,  
An Eternite.

---

### War ar Gontrision

---

Doue gwir bried,  
D'an eneou  
C'houi 'eus va c'hrouet,  
C'houi 'eus va frenet,  
C'houi 'eus va c'hrouet  
'Vit an Envou.

#### DISKAN :

Gwerc'hez beniget  
Mamm driezus,  
Me am lazet  
Dre veur a bec'hed,  
Me am lazet  
Ho mab Jezus.

Abaouie pell amzer,  
Kovez ran ouzoc'h  
Ez oun, va Salver,  
Siouaz ! eur pec'her,  
Ez oun, va Salver,  
Enebour deoc'h

Allaz ! me vo bet  
Bete vreman  
Kals re aheurtet  
Ebarz em fec'hed  
Kals re aheurtet  
Chench a rankan.

---

### An diaoul mut

Pa zaoulinomp evit kovez,  
Hon enebour zo war evez,  
Eman tostig er c'hoztes kleiz  
Diouallit... bras eo e valiz.

Hanvet eo bet an diaoul mût,  
N'e ket hep gwir en deus gwall vrud ;  
Ifernia reaz kalz tud, siouaz !  
Ha kals re all a gollo c'hoaz.

Derc'hel kloz ginou ar pec'her,  
Setu eno e holl vicher ;  
Keit ha ma nac'her ar pec'hed  
Her gout a ra : pardon ebet.

Kaer o pefe iun ha lenva  
Ha lavaret mea culpa :  
Pec'hed a guzer er galon  
Biken n'en devezo pardon.

### Kantik fin ar Mission

Kavet am eus ar peoc'h hag an eurusted,  
Iac'h eo brema ha laouen va ene  
Dindan va zreid an ifern a zo Klozet,  
Dreist an oabl glaz me vell idigor an Env.

DISKAN :

O va Salver, hirio, varc'hoaz ha bemdez,  
Ra vo meulet hoc'h hano dudius !  
Er mission am eus kavet ar vuez...  
Bennoz, bennoz, mil bennoz deoc'h, Jezus (bis)

Em goazied e red freskoc'h ar goad,  
Na gredan mui terzien ar gwaldechou ;  
Va c'halon baour ennon zo yaouankéat  
Deuet eus d'in nerz da garet an Aotrou.

Pegen douz eo tanva ar gwir garantez,  
Meuli Doue, hor C'hrouer hag hon Tad !  
Anaout, karet, setu bonheur an Elez,  
Setu ive bonheur ar c'hristen mat.

### War ar gomunion

Elez eus ar baradoz, sellit pebez enor  
A ra deomp er sakramant, Jezuz, hon Redemptor !  
Eur vech evit hor prena ez eo bet inkarnet,  
Hag evit dont d'hor maga ganeomp e chom [bepred.

DISKAN :

Mari, gwir vamm da Zoue, Mari va mamm dener,  
Va sikourit da reseo ho Mab ha va Salver.  
Me ne d'oun siouaz ! netra, netra nemed pec'hed,  
Mez ennoc'h ec'h esperan, o va mamm beniget.

Krouer an Env, an douar, war an aoter, bemde,  
Dfe gomz nerzus ar beleg, a zisken eus an Env.  
Eun Doue, kals uheloc'h eget ar firmamant,  
En em izela dindan spesou ar Sakramant.

O mirakl ar souezusa etre ar miraklou !  
O burzud na c'hell kompreñ ar c'haera sperejou !  
Evit gounid kalonou ho pugale ingrat,  
Ho magit, o va Jezuz, gant ho korf hag ho kwad.

## War ar Gomunion

Deut holl ha deut gant fe,  
Deut d'ar banked presiu ;  
Galvet hoc'h gant Doue  
Da zebri ouz taol Jezuz.

Jezuz,  
Baradoz an ene  
Eo chom ganeoc'h noz-de.

Ma c'hoantaît danvez,  
Aman eman an tenzor  
Hor rent e gwirionez  
Pinvidikoc'h eget ar mor :

Jezuz,  
Perc'henn an holl vadou  
Ha mestr an holl c'hrasou.

E gorf, goad hag ene,  
Ebarz en hosti kuzet,  
Gant e zivinite  
A zo war daol ar banked.

Jezuz,  
Biskoaz n'eus bet eun tad  
Evel c'houi douz ha mat.

## Adoromp Doue

O Sakramant burzudus  
'Lec'h omp maget gant Jezuz :  
Ennan eman hor Salver,  
Kredi a ran war e c'her.

## DISKAN :

*Adoromp Doue  
E Sakramant e garante.*

Jezuz, d'an noz 'raok mervel  
'Ro galloud d'an Ebrestel  
Da jench ar bara, ar gwin  
'N'e gorf hag e wad divin.

Ar beleg, d'ar gorreou,  
A lavar e wir gomzou,  
Ha raktal Jezuz-Salver  
A ziskenn war an aoter.

N'eus mui na gwin na bara,  
N'eus nemet Jezuz ama :  
E gorf sakr, e wad divin,  
'Lec'h ar bara, 'lec'h ar gwin.

Adoromp hor Roue bras  
En Envou ha war ar groaz ;  
Adoromp hor gwir Salver  
E Sakramant an Aoter.

